

YF_0096_An daou gamarad fidel

An daou gamarad fidel a lare 'n eil d'egile:
Dont a rit-c'hwi kamarad, 'h eomp hon daou da vale.

Dont a rit 'ta kamarad, 'h eomp hon daou da vale,
'h eomp da weled ma mestrez, hag ho hani ivez. hani=hini

Deomp da welet ma mestrez, hag ho hani ivez,
Deomp da wel' Mari-Jozon 'zo 'chom en Kozh-Korle.

An amzer a oa ken brav, al loer a oa sklaer, loer=loar
Mont a reomp en ur ganañ, betek penn al leurger.

Met pa oemp arru ennañ, me am 'oa remerket
A oa lazhet ar goulou, ha aet an dud da gousket

A oa lazhet ar goulou, ha aet an dud da gousket,
Oa ket ken war ar bale 'met ar galimanted.

Oa ket ken war ar bale 'met ar galimanted,
Peotramant paotred yaouank, 'hont da wel' ar merc'hed.

Me lare d'am c'hamarad: tevet, n'em dourmantet ket
Bep ma skoïomp war an nor deomp ni vo digoret

Bep ma skoïomp war an nor, an daou pe an tri daol,
Neuze teui an hini gozh da zigoriñ an nor.

Nimp a oemp daou zen yaouank, karget oemp a spered,
'N'om antreal 'barzh an ti: Bonsoir, a mep laret N'om=En ur mep=on-eus

'N'om antreal 'barzh an ti: Bonsoir, a mep laret
Ha goulenn gant ar re gozh, ma oaint war o yec'hed.

O ya sur, eme an hini gozh, yac'h omp bras ha bihan.
Kemerit bep a gador, didostit da dal an tan.

Kemerit bep a gador, didostit da dal an tan,
Me 'zo vont d'ober deoc'h kolasion goude koan.

Kolasion goude koan, me na c'houlennan ket
Met kaozeal gant ho merc'h Mari, ma vez dimp permetet

Me weles an hini gozh 'tiwiskan he botou
Ha da lampad war ar bank, war blantou he loerou

Savit 'ta ma merc'h Mari, savit 'ta alese
Da gonto gant an dud yaouank 'zo arruet ame. ame=aman

Feiz ma mamm baour, emezi, me na savan ket
Na d'ar c'houlz-se deus an noz, da barlanto gant paotred